

**Mari**

– Debonjour deoc'h, va mestrez ker  
 – A joa dec'hui, va chervicher

– E man deud an amzer dija  
 Na rankomp ober pe freuza

– E man deud dija an amzer  
 Ma rankomp ober pe lezel

- Mar deo demizi a fel d'eoc'h  
 Den iaouank ne zemezin ket deoc'h

Me meus c'hoazet evid briet  
 An hini en deus krouet ar bed

An hini a neus krouet ar bed man  
 Ag a rer Doue a nezan !

A zo maro evid omp oll  
 Da vired na hai den da goll

Pa edon en iliz en orezon  
 Em boue eur revelation :

E voe gant eun ell din lavaret  
 Moned d'ar gouent lezel ar bed,

Moned d'ar gouent da leanez  
 Lezel souziou ar bed a gostez

– er gouent ma viot leanez  
 Grid ma vezin abbad va mestrez  
 Dindan eur vantel e plederi  
 Eur beleg evid on eureuji.

Va mestrez a ben eur penad dervez  
 A neuz ni ambuzet assamblez  
 A toud e zint amzer kollet  
 Mar de guir ar pez a leret.

Mar o c'heus den iaouank amzer gollet  
 Eo just e veec'h rekompenset  
 Me pedo Doue Deïs a noz  
 Wit nem velimp er baradoz.

— Didostaît aman va mestrez  
 M'ho hambrassin hoas evid eur vech  
 Deud din eur pok da kimiada  
 Evid ar c'himiad diveza.

— Dellit va dorn ma kimiadimp  
 Evid dam bizaj ne bokot mui  
 Ne bokot jamez d'am bizach  
 echu amzer ar vignonach.

— Dallit va mestrez eun diamant  
 A roan me deoc'hu a bresant  
 Lakit-ti var o dorn deo  
 Walen Doue or c'honduo.

— O sallokras sur den iaouank  
 Ne meus ked affer o diamant  
 Ar walen deus a zorn Doue  
 Zo en tre zomp-ni noz a de !

Mar fel deoc'h gouzoud a klevet  
 Gant piou ar zoun kompozet  
 An otrou Kolliou a blougerne  
 En doa e c'hompozet varlene.

Catherine Laninor, 3 mars 1851.